

Bonjour dec'h plac'h iaouank a gwir a meus klevet
e vijer deud dam dilezel ag e vijer demeet.

— o sallokras den iaouank demeet nan on ked
mez var ar poënt da vez a var an ent da vonet.

Deambuzi an amzer kozeal a ra vad
Kavet plijadur dezir an daou lagad.

— O c'chia va mestrez me a gouie er vad
e vijer deud dam dilezel pa o piche kavet o mad
mes breman me iel da ermit bars en eur choad benag.

— O sallokras den iaouank da ermit nen deot ket
C'houi a zo iac'h o galon ag a kao mad o bouet.

hag er c'hood ne kafchot nemet gruichou louzou
a c'hoas no po ked leis o gorf a nezo.

— O sallokras va mestrez ne vo ked diez karge va c'halon
Rag karget e dija ganec'h deus(1) a zesolazion.

— ma c'houfen sur den iaouank e verc'h ken dezolet
me a leze peb eunan evid o kemeret.

Deomp-nhi breman treuzek illis sant Per
Da c'houd a ni kavo ar veleïen er ger.

a ma na main ket er ger breman deui a hane
a pa vezint deud er ger ni iello adare.

— O sallokras va mestrez dar ger ne deuimp ket
gant aont na rankontrer plijadur o taoulagat
mar deufoc'h dam dilezel me a ve eur miserabl.

Anna Briant, greg Prigent, labourerez en Taole.
24 juin, (7 h du soir) 1851.

(1) Ces mots, soulignés dans le ms. Penguern, sont ajoutés dans l'interligne supérieur.